

DISPUT

ENTRE AN DOUR HAC AN TAN.



Var un ton neté.

Va speret a so genet , n'en deo qet ep repon ,
O studia va e'hentel hac o elsq ar feçon
Evit formi un disput entre an tan hac an dour :
Unan anê a zo foll hac un all zo traitour.

An dour en deus pretantet eo en ar e'habiten,
N'en deus netra evintàn na n'e vezo biqen ;
Ennez eo an nourritur hac an necessera ,
Na vevo na tud na loenet evit ma teui da vanqa.

AN TAN.

Bea e e'heus ar pouar da ober q'issent so ,
Ne fell qet diu resista demeus da buissanço ;
Mes evel ma ve formet gant ar bleud ar bara
E ranqàn dont d'e boazat , pe ne dalle netra.

AN DOUR.

C'hoant e pens da lavaret e oude necesser ,
Ha te ebars er bed-man qirico da vil malheur.
Disolo res pignonou , consommi ar madou ;
Ne van netra ez dilec'h nemet ar vogueriou.

AN TAN.

Te gant da dreitouriach a barlant d'ireon ,
Ha ne laboures james nemet dre draison :
Longa res batimanchou hac enne e'hoec'hmikdon
Hac en eur moment goude e teu adare da bien

AN DOUR.

Caer e peus va dicria, e ranques plega din,
 Rac en instant ma santin e po c'hoant da greguin,
 E teuin da c'hetouffi ha d'ober did mervel,
 Ep ma po an avantach da allout mui sevel.

AN TAN.

Abalamour ma peus bet digant Doue pouer,
 Ez out eur vantezoner hac eur mestr marvailler.
 Caer e peus e oll boenchou donet d'en em vanti,
 Qent ma vo fin d'hon disput e ranques coll guene.

AN DOUR.

Estoneton, eme an dour, da glêvet ho gonizou;
 Goude beza recevet qement a bouariou,
 E ranqàn collgant un dra ne ra nemet maleur,
 Ha me laqet da veva ar bed-oll en antier.

AN TAN.

Formi a res ar bevanç hac an oll chorionmad;
 Ober a res ar zouben hac ar boed delicat :
 Avoui ràn ez eo te eo ar poent qenta,
 Mes me, o tont d'o foazat, eo an necesserra.

AN DOUR.

Peneverdon, eme an dour, e voa'n dud payanet,
 Ne vije na badeziant, nac oferen ebet :
 Evit ober eur c'hristen e ranqer plega din,
 Ha memes tra adare pa deuer d'e vadezin.

AN TAN.

Ha me zalc'h beo ar goulou da rei ar selèrijen
 D'ober ar vadianchou, da laret an ofern,

Hac epad ar gousperou e labouràn are :
En ilis hon necesser, hac en noz hac en de.

AN DOUR.

Bea em eus ar pouvoar da ziampoezoni
Qement so bars er bed-má carguet a loustoni,
Conservi ràn ar yec'hed hac ar prosperite,
Qercouls d'an dud ancien evel d'ar vugale.

AN TAN.

Rinç a res al loustoni demeus an oll dillad ;
Onnes a zo eur rêson hac a zo plasset mad ;
Mes caer ec'h eus o goalc'hi, mar be astu oute,
E rançer dont d'o birvi qent dont a benn ane.

AN DOUR.

Caer e peus va chicanat, eo me è ar c'hrevá :
Me laqa da broduiement zo er bed-má,
Ha te zo un elemant hac un dra execrabl,
Ha qement a fy ennout a rentes miserabl.

AN TAN.

Biscoas n'ameus grêt maleur n'ambe avertisset,
Rac aroc ma flaminàn e veler ar moguet ;
Hac ar re a vo fonnus da zont d'am etouffi
A lammo en un instant va buez diguene.

Ar c'haera sqienchou tud a deu da lavaret
E coll an tan gant an dour ebars en peb andret,
Mes me lavar er c'hontrel eo an tan a c'honc,
Hac a zisclêrio facil d'an oll en guirione.

An tan, evel ma velas na elle mui difen
Ouz an dour, en em blasset da guza en ur men,
Tennit-àn a fonç an dour ha torrit anezàn,

Hac en ur moment goude oc'h eus tan dioutañ :

Cetu int camaradet, hac an tan a c'hone,
 Ha ne voden incredul demeus a guementse.
 Un dra hac a so prouvet gant un nombr bras a dud,
 Ar rason-mañ a finis entreze an disput.

AN DOUR.

P'ester vertu a zongàn en eur podat souben :
 D'ar guenti, mar be're zall, me e grei dizolen;
 Mar be re vian e cresq, ha re domm e yeo,
 Ha mar deu dei bea teo m'en laqay tano.

Sellaouit. asistantet, qent evit finissa :
 Evel m'en devo pouar e tui d'e c'himprima ;
 Mes frezet eo e ven-gleuz hac e renq caout amzer
 Da zont d'he diatredi qement devo pouar.

An ini en deus composet ar ganouen neve
 E dicto d'eur scrivagner hac e lenno goude :
 Domicil eo a Bleuyel, he ano Yan ar Guen :
 En traonien ar c'hrec'h Sulliet e medi e lojen.

Cetu amañ eur rason plasset gant ur gaonyat,
 Penos e ouffe-én lenn a zerret e zaoulagad ?
 Aboue an oad a zeiz mis n'en deus goelet netra :
 Divertissa a ra an dud en qement plaç ma c'ha-

FIN.

BEGIT COMPOSET A NEVEZ

VAR SUJET MALEURIOU

ERUET EN ESCOPTI GUENET, SR BLA 1823.

Var ton santes Anna.

Me o ped, asistantet, tostait da glêvet,
Rac qement a zelaone a vezo estonet
O clêvet ober recit demeus a c'hoec'h malettr
Erruet er memes ti, en eur memes amzer.

En escopti a Venet, er bla tri-varnuguent,
Eur pêvar pe pepap devez aroc gouel an oll Zest,
Eoue êruet ar maleur, sellañuit, christenieur,
Estonet eo va c'halon o tenet d'e gompren.

O Itron santez Anna! d'ec'h en em adressad :
Roit d'am speret al lumier, ma c'hallin disclerigad
Evel ma zeo êruet ar maleur pen-da-ben,
Mar o pe ar vadelez da rei din sclerijen.

Eun domestiges fidel, ma oa er vro hini,
Aro bet gant an dud-màn c'hoec'h bla o servich
Pa echuas he amzer zeo bet demezet,
Hac e za d'he zieguez soudan gant he fried.

Ar vreg demeus an ti-màn a zo guillioudet ;
Ha p'e deus grêt he beach e deveus commandet
Qero'hat ar plac'h var e zro, dre ma gavo hini
Da blijout d'e santimant evedl d'e soign.

He fried a dremene, o vont d'an ofern-brêl,
Abiou da di ar plac'h-màn, hac a zo autret
Evit donet d'e fedl ma tenje var e zro
Da soigni deus anezi hac he bugaleg.

Evel ma voa sortiet an den-màn eus an ti,
E zint bet en em glêvet hac he fried hac hi,
Da zont da di ar vreg-màn en eur goel santimant,
Dre ma ouicat ce'h elle cavet un tam ar'o'bant.

Destinet o deus eur plaç evit en em gavet
 En hent, an daou valeürus, pa zint dispartiet.
 Hi a yaje da zestum an arc'hant eus an ti
 Hac en a chomje er plaç-ze, da zeport anezi.

En eur antren e rentas ar bonjour d'he mestrez,
 Qent ma tiscoeje dezi e voa un dreitourez,
 An hardizder he devoa hac an infrontiri
 Da zonet d'e zraissa goude e zaludi.

Ar vreg-màn a ziscueas caout ar joa vras ounti,
 Allas! dre na sonje qet en drañs impi,
 Hac e sedas da zibri ha memes da eva
 Qent evit ma labourje, demeus ar peb guella.

Ober ra un dro en ti ha çemeret un hach,
 Ha da guichen ar gouele ractal e tilampas,
 Hac ee'h annonças dezi e ranqe caout arc'hant,
 Pe e colje he bue ganti en un instant.

Ar vreg-màn qen sesisset, a lavaras dezi,
 Goude bea goulennet he bue diganti :
 Er c'huz-tol e meus poset aze anter-cant scoet,
 Cassit ganec'h anezo, ha va lest var ar bed.

Goude destum an arc'hant, e tistroas are
 Var ar vreg-mà gant an hac'h, da gichen he gouele
 Hac e lavaras dezi e ranqe caout ouspen,
 Pe e raje en un tol daou anter eus he fen.

Aze er c'haou, emezi, entre diou variqen,
 Em eus goelet va fried, qen monet d'an ofren,
 O plassi e oll arc'hant eus e varc'hadourez;
 Disqen ha qe da vite, emei, miserablez.

Monet a eure d'arc'haou da gere'bat an arc'hant,
 Hac ar vreg-màn a zavas en eur memes instant,
 Hac e deus bet ar gourach, dre c'hraç santes Anna

Da alc'hoei varnezi ha d'he dere'hel enna.

Eur bolrezic e devoa, deus a nao bloa oaget,
Gant qement a ret dezi n'e c'habandonnè qet;
Cass ra he buguelic da vit he zad d'ar guër,
Ha laret dezàn e oa var ar poent da vervel.

Evel ma c'hez ar buguel da gomanç pen he ent,
Hac oc'h êruout ganti ar maleürus qerqent,
Hac e c'houlennas ounti: pelec'h ez, emezàn?
Ar buguel var e malheur a anzavas euntàn.

Pa glevas ar miserabl iêsoniou ar buguel,
O laret a voa he mam var ar poent da vervel,
E sonjas e voa scoet da anzav an archant,
Hac e tostaas d'an ti gant furi ur sar pant.

Forci a ra ar buguel da zont en dro gantàn,
Vit ma tigorje he mam, pa glêvje anezàn.
Pa êru en tal an nor e scoas varnezi,
En ayis caouet digor evit antren en ti.

Me am eus anoudeguez ennout a bell a zo;
Dre da urz onn glac'haret ha dre da avizo:
Na ziguerin qet an nor dit na da zen abet.
Qen na zistroy va fried demeus an ofern-bret.

Da vuguel a c'houl digor, ampoeson didalve;
Te a vo qirice dezi ma collo he bue,
Rac me ya d'e zol er punç, ma n'a zigueriez qet,
Var he c'hîr ar maleürus en deveus-hi tolet.

Goude e seueillas en ti, evit ma c'halje antren;
Sevel a eure enni da deurel ar veren,
Evit distouva un toul da ober e antre,
Gant ar goler eus ar vreg, m'en dije he bue.

Ar vreg-màn a vale e dre bevar c'horn an ty,
pedi santez Anna hac ar Verc'hes Vari,

A gavas eur valz-gontel hac en deus-an scoet,
Hac a drugare Doue en deus-an dibennet.

Pa vel ar pen o coea e oue epouvantet,
Ha ma saillas d'he guele evel un den follet.
Donet a ra da sempli ha sious! da goeza
Vat he c'hrotadur daou de, hac e teu d'e laza.

Pa êrnas he fried demeus an ofein-bred,
Eo eur digueri deân e deveus declaret
Eon beuzet ar buguel ha lazet eguille,
Dibonnet ar miserabl ha dalc'het ar plac'h-se.

An den-ma, oue e c'hlevet, a guemer analc'hoo,
Da zigueri varnezi, d'he lensqel ac'hane,
Hac evel ma tigoras en deveus-hi scoet,
Ha gant un tã seulamant en deveus-hi lazet.

Goude ober e dorfet e zeo bet distroet
Entreze hac ar gouele, da gonta d'e bried,
Ha pa zistroas en dro oa e vreg o vervel,
He glac'haret e galon gant quez d'e zaou vugtel.

Pa e guelas o vervel, e zez en dizesper
Pourra e zorn en e c'hodel ha tenna e gontel,
E quanta en e galon, ma leuas da goneza,
En lec'h bea gortoet Doue d'he funissa.

An dud, goude ho leino, o vont d'ar gontesperou
O oa custum da antren da eva banac'hou,
O velet ar maleuriou a deu da estoni,
Hac a vez en eur vanden en qer da zeclari.

An ini ra ar recit demeus ar c'hoec'h malour
Einet er memes ti, en eur memes amzer,
A chom en parres Pleuyel, Yan ar Guen e hano,
Hac a c'houien a galon ma zoint oll d'ar joayo.

Goengamp, eus a imprimiri B. Jollivet.